

YF_0133_An hini a garan

An hini a garan, gwechall bihan er ger
Pa oan tostig an eil, an eil diouz egile
Va c'halon ne gare, gare nemed unan
Pa oan bihan er ger, an hini a garan

An hini a garan, eun deiz n'eus va losket
Aet eo d'ar broiou pell, d'eur vro n'anvezan ket
Aet eo d'ar broiou pell da c'hounid e vara
Kollet, Kollet un deiz, an hini a garan

An hini a garan m'eus kollet da viken
Ema digouezet pell ha ne zizroio ken
Ha setu ma kanan, kanan keti ketan
Ha setu ma kanan, d'an hini a garan.